



Son ar G'hrampoez Gwiniz

WAR DON : *Fransoizik ha Pierik.*



— « Janedik koant, ma c'harante,
'N eur ober krampoez gwiniz,
Janedik koant, ma c'harante,
Da biou 'vo ar gram-poezen ze ? » —

— « Yannik Garlan, 'n hini gentan,
'N eur ober krampoez gwiniz,
Yannik Garlan, 'n hini gentan
'Vo 'vit ma zad kez, a gontan. » —

— « Janedik koant, ma c'harante,
'N eur ober krampoez gwiniz,
Janedik koant, ma c'harante,
Da biou 'rofet an eil goude ? » —

— « An eil ane roïn d'am zad,
'N eur ober krampoez gwiniz,
An eil ane roïn d'am zad,
Yannik Garlan, ganthokrad vad. » —

— « Janedik koant, laret d'in-me,
'N eur ober krampoez gwiniz,
Janedik koant, laret d'in-me
Evit piou e vo an drede ? » —

— « 'Vit ma mamm e vo an drede,
'N eur ober krampoez gwiniz,
'Vit ma mamm e vo an drede,
Gwa da nep 'vo diez gant se ! » —

— « Hag ar bederved, Janedik,
'N eur ober krampoez gwiniz,
Hag ar bederved Janedik,
Na vo ket 'ta 'vit ho Yannik ? » —

— « Ar bederved, Yannik Garlan,
'N eur ober krampoez gwiniz,
Ar bederved, Yannik Garlan,
A roïn d'am breur henan Yan. » —

— « Nag ar bempved, Janedik kez,
'N eur ober krampoez gwiniz,
Nag ar bempved, Janedik kez,
Da biou e vo lardet hounnez ? » —

— « Ar bempved, an hini wellan,
'N eur ober krampoez gwiniz,
Ar bempved, an hini wellan,
'Vo 'vit Per, ma breuryaouankan. » —

— « Ha me neuze 'ta, ma dousik,
'N eur ober krampoez gwiniz,
Ha me neuze 'ta, ma dousik,
'Mo ket unan deuz ho tornik ? » —

— « Ar grazen a pezo, kezik,
'N eur ober krampoez gwiniz,
Ar grazen a pezo, kezik,
Ma n'a ket gant ma c'hi Loullik. » —

— « C'hwi a zo ouzin didrue,
'N eur ober krampoez gwiniz,
C'hwi a zo ouzin didrue ;
O karout 'ran kalz koulskoude. » —

— « Didrue, zur, me nan on kef,
'N eur ober krampoez gwiniz,
Didrue, zur, me nan on ket,
'Met kaojo divlaz a laret.

Ha, war ze, ho pedan eta,
'N eur ober krampoez gwiniz,
Ha, war ze, ho pedan eta
Da vont 'lec'h all da c'houileta. » —

LAOUIK.